

Guery
Perrinaic ar Mignon.

(212)

Var ton :

Ebars er bla mil eis cant unan ha daou ug'ent,
Er g'er eus a Sannion eus eur maeur arruet,
Erruet gant eur plac'h yaouanq a oa o servichi
E ty eur marc'hadour quin en un hostaliri.

Erruas daou valtoutier en ty evit coannya,
Evit c'hoari eur barti d'en em divertissa.
Pa voa debret hag evet, gret ar scoden gante,
E c'houlenjont Perrinaic da vont d'o c'has d'ar g'er.

Homan e d'oa ur vestrez carg'et a vadelez;
Al letern hag ar goulou a roas d'e mateg;
Dal, emei, Perrinaic, al letern hag ar goulou,
Lundu an dud gentil - ma d'en traon dre ar ruyou.

Deus Perrinaic ar Mignon o devez distroet:
Na vouchit-u ho letern, lazit ho coulou scler?
Penos fel dec'h, otronet, m'o condufen d'ar g'er,
P'am bo mouchet va letern, lazet va goulou scler?
Mes evelqent, tud gentil, evelse e vo gret,
Peurvuian an dud honest a zo et da gousquet.

(213)

Arca-ta, Perrinaic, deut-u ganemp d'om zyg,
M'o laqai da davei demeus a dri sort quin.
O salocras, emezi, aus eus hoc'h offrou quella,
E ty va mestr zo peder, pa garan e c'hefan.

Homan e d'oa ur vestrez carg'et a vadelez,
A chomas var ar bale da zepart he mateg.
Penos, otrou'r Senechal, c'houi a gousq divorc'het,
Va plac'h qez Perrinaic er g'er na erru get.

187

(214) Var ar pont-Santer, Anna e cas ar plac'h maro,
Al letern en e c'hichen, hag ar goulou beo.
Adieu ta, Perrinaic, te voa eur plac'h a fezon,
Vaillantâ plac'h a varche var bare Sannion.

(Vol. II, p. 212-214.)
7 str. numérotées.